

(445)

Da un Tad,  
Var maro e vab. m. g<sup>t</sup>

Ebars en draonien - mâ a zaelou arrouzet,  
 Na veler peurvuia nemet ences bepret;  
 Mar hon eus arichou eur moment plijadur,  
 Pequen ger eo prenet dre galz a vocastadur!...  
 Den yaouanq e sonjen em c'halon alies  
 Ne voa gen stat parfet hac ar briedeles.  
 Souden e temeris d'eur plac'h a garrien mad;  
 Meurbet e zoamp eurus: hon Daou e voamp d'omp grad.  
 Hon daou e c'houlenjomp ouz Doue, hep dale,  
 Donet d'hor beniga, o rei deomp bugale.  
 Doue a deurezas exauci hor beden,  
 Hac hor boe eur mabic hon rentas calz laouen.  
 Allas! ne sonjemp get, bars en hor plijadur,  
 E renqjemp prest divouer hor paouric crouadur!...  
 A boan e voe oaget demeus a zeitec mis,  
 Ma voe hor buquel paour scoet qant maro criis....  
 (446) Nac a bet quech, e creiz cl'evéd va buquel qez,  
 A vouelet va c'halon e criis alies:  
 Doue oll-galloudus! conservit va buquel:  
 Mar fell d'êc'h eur victim, me zo prest da vervel...  
 Allas! va oll hirvoud na voe get sellamet,  
 Hac e renqis gouela va buquelic bepret.  
 Reservit e voan c'hoas da gollou calz brassoc'h,  
 Rac c'hoec'h crouadur all hor boe divezatoc'h.  
 Doue hepken a voar petra voe hor glac'har:  
 O c'hoec'h e renqjomp c'hoas o renta d'an douar!...  
 Ne rejont er bed-mâ, allas! nemet tremen:  
 Padelez ur rozen o devoe hep mui-gen.  
 Doue a'nfin touchet eus hor glac'har eurus,  
 A brizas hor sellet a galon truezus:  
 Hirio hon deus diou verc'h ha daou vab en bue,

500

Mes hor c'halon a rann evit oll gementse,  
 Roc sevel bugale hep o renta eurus  
 Zo d'ur tad ha d'ur vam, sivoas goal glac'harus!  
 Dreist oll, pa ve poaniet qeit all a vloaveziou  
 Hep o renta eurus arauc fin hon deiziou!...  
 Evelse-ta e zomp amañ var an douar :  
 Arisiou er joazou, alies er glac'har.....  
 O Providanç divin! digomprenus d'an den!  
 Deurvezit, ni ho peot, otrei hor peden....  
 Teulit eur selladen tenerus var un toad,  
 Rannet oll e galon gant ar c'heus d'eur mab mad.  
 Grit dezàn, dre ho c'raç, souten e stat euzus;  
 Ha rentit e galon nebeutaoc'h caonvaüs.  
 C'houi hepquen, va Doue! dre ho c'raç souveren,  
 A ell dont d'ey sicour en eur c'her bras angen.

(447)

5 meurs 1837. A. Lédan.

(Vol. IV, p. 445-447.)